

## KIS-770 – Genadoù ar c'hoariva

(GE da PK – 25 08 02)

Gl. **comédie**. Evel a welez e GEME. e 'm eus adkemeret termen GReg. : *komedi* g. ha dilezet kinnigadennoù all VALL., en o zouez *komedienn*, hep kavout kantrat sevel un anvad du-mañ evit ur genad istorel ; deveret 'm eus *komedi skañv*, *songomedi*, *komedi a blegenn*, hag amprestet *sitkom*.

Gl. **comédien**. Ar ger-mañ zo dezhañ da geñvereg Br. *dremmour* ; ar gudenn a chom da droc'hañ eo houmañ : ha Br. *komedian* a vo lakaet heñvelster da *dremmour* pe a dalvezo kement ha "dremmour o c'hoari ar c'homedien" ? A-du e ven gant ar c'hemeradur-mañ diwezhañ, dre un abeg a zo anat amañ dindan, sl. *acteur comique*, *tragédien*.

Gl. **comique**. Meur a generadur : 1. Ar genad (*le comique*) ; evel evit anvadoù ar skourroù obererezh pe skiant, e tibabfen an termen etrevroadel dre *-ik* evel *fizik*, *elektronik*, eleze : *komik* g., *ar c'homik*. 2. An adanv a c'hallfe bezañ deveret diwar *komik*, eleze *komikel* (pa zaveer d'ar genad) ; er ster hollek, boutin, e rafen gant *komek* (evel ma reer gant *elektronek* e-kichen *elektronik*, *elektronikel*). 3. Pennanv, perzh bezañ *komek* : *komegezh* (*komegezh un dudenn*, *ur blegenn*, h.a. ; termen en arver abaoe 1970<sup>1</sup>). A se e ve lakaet kemm etre *komik a blegenn* (genad), *komegezh ur blegenn* (perzh).

Gl. **comique de gestes, de mots, de caractère, de situation**. Dit da welout pehini eus *komik* ha *komegezh* a zere (pe an daou hervez an dro) : *k. jestroù*, *gerioù*, *neuzid*, *plegenn*, *fars* (diaes e vo na zegemer ar ger-mañ, o taveñ d'an tremened, hag a oa en arver endeo e krennvrezhoneg, sl. GIBR.).

---

<sup>1</sup> “[...] Napoléon 3 a venn dispenn roudoù Napoléon I<sup>er</sup>. Hogen, mar lezer a-gostez an diforc'h meneget gant MARX etre tragegezh an drovezh kentañ ha komegezh an eilvet, e kaver teir nevezadenn a bouez e houmañ diwezhañ [...]” *Emsav* 44, Eost 1970, p. 258.

Gl. **acteur comique, comique**. Br. *komedian*, termen berroc'h eget *dremmour komedi* (arveradus bepred evel just), ouzhpenn se kemparzhed da Br. *tragedian* a gaver pelloc'h.

Gl. **auteur comique**. Ne ven ket a-du evit kemer skouer diouzh ar galleg pe dremen gant *aozer komedioù*. Un deveradur eeun a ro Br. *komediour* (o verkañ ur c'hemm gant Kb. *comediwr* "comedist ; comedian"). Un termen all gallus eo *komikour* (embregour ar c'homik).

Gl. **tragédie**. Da gaout ur reizhiad unvan, e kinnigan lezel a-gostez gerioù VALL. koulz ha GREG. (*trajedienn*), evit erlec'hiañ *-g-* ouzh *-j-* ha kemplegañ da erlevioù Roparz HEMON na pa dremen eñ hep o heuliañ, ha lemel an *-enn* dibenn : *tragedi*.

Gl. **tragique**. 1. Genre tragique (*tragique* g. ne hañval ket revout er ster-se e galleg) : *tragik* g. 2. Adanv : *tragikel* (pa zaveer d'ar genad) ; ent hollek : *tragek*, termen en arver abaoe 1964<sup>1</sup>. 3. Pennanv, perzh bezañ tragek : *tragegezh*, en arver abaoe 1970<sup>2</sup>.

Gl. **tragédien**. Dremmour tragedi : *tragedian*.

Gl. **auteur tragique, tragique**. Br. *tragediour*. Termen all gallus : *tragikour* (embregour an tragik).

Gl. **drame**. Dedroadur istorel ster an termen hag e zeveradoù n'int ket bet kenstur : en derou e talvez *drame* nep pezh c'hoari, hiziv ez eo strishaet an erdal d'ur genad hepken ; hogen *dramatique, dramaturge* o deus dalc'het an erdal ledan ; heñvel dra, an deveradoù *drame lyrique, mélodrame* zo genadoù c'hoariva diforc'h diouzh an *drame*. Seurt kemmesk a zeu a bell, pa dalveze endeo Gr. *dra'ma* kement ha "pezh c'hoari, niñv"

ha *dramatikov* "c'hoarivael" ; a du 'rall, n'eus e-touez deveradoù *théâtre* (Gr. *qevatron* a aroueze al lec'h ma veze c'hoariet, dres evel ma ra *c'hoariva*) hini en defe sammet ar c'hemeradurioù a zo re *dramatique, dramaturge* hiziv (Gr. *dramatourgov* " en doa endeo ar ster en deus *dramaturge* hiziv).

Ar gudenn evidomp eo ha deveret e vo diwar *c'hoariva* an termenoù o tennañ d'ar c'hoariva en e ster ledan, pe ha heuliet e vo skouer ar yezhoù a denn eus ar gresianeg o

<sup>1</sup> "[...] an holl « De-profundis-ed »-se a fell dezho ma ve sellet outo evel harozed tragek, renerion gelaouennoù, boñbarded, furerion folklor ha pennoù termaji [...]" (*Preder* 58, p. 62).

<sup>2</sup> Sl. p. 247 a-zioc'h, n. 1.

hanc'herieg a'r c'hoariva. Moarvat e rankimp tremen gant diskoulmoù etreat : *c'hoarivael*, *c'hoarivaour* diouzh un tu, *melodrama*, *drama lourennek* (pe *sondrama*), *komedi dramaek* diouzh an tu all.

**Gl. *dramatique*.** Evel an diaraogerion, e teveromp war-eeun diwar Br. *drama* : *dramaek*, *dramaour*, h.a. (e-lec'h ober un eil amprest *dramat-*). Dav e vo derc'hel kont eus kemeradur ar ger gallek e pep hini eus e arverioù : Gl. *art dramatique*, Br. *arz ar c'hoariva* ; Gl. *dramaturge* (= *auteur dramatique*), Br. *aozer c'hoariva*, *c'hoarivaour* ; (= *auteur de drames*), Br. *aozer dramaoù*, *dramaour*. E degouezhioù 'zo e ranker trozañ reolenn an dibab *c'hoariva/drama* ; da skouer : Gl. *dramatique (télévisée)* (film o tennañ d'ur pezh c'hoari hep bezañ unan — termen a hañval bezañ dispredet a du 'rall e gounid *téléfilm*) ; diaes e ve lavarout *film c'hoarivaek* pa geveneber ar fiñveier hag ar c'hoariva ; an diaester-se a'm eus kredet hepkoriñ dre heuliañ Sz. *film drama*, *TV drama* ha kinnig *drama pellwel* pe *film pellwel*, *telefilm* hep mui (GEME.).